



Redadeg 2012

Galv d'ar raktresoù

- 1 • Ar raktresoù dibabet e 2010
 - 2 • Temz-spered ar Redadeg
 - 3 • An diazezoù
 - 4 • Mont-en-dro galv ar raktresoù
- Stagadenn : Teuliad emginnig**



1 • Ar raktresoù dibabet e 2010

Adlañsañ a ra Ar Redadeg evit an eil gwech ur galv raktresoù e 2012 evit kas war-raok ar brezhoneg. Digor-tre eo ar galv-se. Ne vez difennet danvez ebet, soñj ebet, micher ebet. Neb a gar a c'hell kinnig ur raktres gant ma 'z eo e bal kas war-raok broudañ hag implij ar yezh.

Ar raktresoù dibabet warlene a oa :

Web Radio	Radio Kerne, Arvorig FM, RKB, RBG	6 000 €
Sevel ur sistem podkast evit ar radioioù e brezhoneg war internet		
Levrioù da selaou	Al Liamm	10 000 €
Sevel levrioù da selaou war bladennoù evit an dud deuet		
Tap da roched 'ta !	Strollad Gouren Aodoù an Arvor	5 300 €
Krouiñ stajoù Gouren e brezhoneg ! Stajoù evit ar re 8-16 vloaz.		
Malizenn bedagogel	Ti ar c'hoadoù	10 000 €
Sevel ur valizenn bedagogel diwar-benn an natur ha skignañ anezhi e-touez ar c'hreizennoù natur.		
C'hoariva evit ar grennarded	Strollad Ar Vro Bagan	6 000 €
Krouiñ ur pezh-c'hoari istorel evit ar grennarded.		
Breizh Akademi	Studi ha Dudi	6 000 €
Krouiñ ur staj Brezhoneg ha dudi evit ar grennarded a zo o teskiñ ar yezh hag a fell dezho mont war-raok gant ar brezhoneg		

Peseurt raktresoù a vo ijinet ganeoc'h evit Redadeg 2012 ?

Mall a zo warnomp degemer ho raktresoù ha lenn ho teuliadoù !...



2 • Temz-spered ar Redadeg

Un darvoud breizhat eo « **Ar Redadeg a di da di** » aozet war dachenn Breizh (ar pemp departamant) bep eil bloaz. Lieslec'h eo ha desachañ a ra da genlabourat dorn-ha-dorn kement kevredigezh, kement embregerezh ha kement den a zo tomm e galon ouzh ar brezhoneg hag ouzh e implij pemdeziek.

« **Ar Redadeg a di da di** » a zo he fal talvoudekaat ar yezh, en he finvidigezh hag he liesegezh, ha kas war-raok ar brezhoneg hag an implij anezhañ .

Un dro eo an darvoud-mañ ivez evit dastum arc'hant a vo roet war-lerc'h, evit ul lodenn, da zougerien-raktres. Redet e vo 1500 km e-pad 8 devezh ha 7 nozvezh e 2012.

3 • An diazezoù

Dougerien ar raktresoù a ginnig ur raktres diwar-benn implij ar brezhoneg war ar pemdez hag e diabarzh ar gevredigezh. En em c'houestlañ a reont da heuliañ ar c'hrafoù-mañ :

- Bez e rank ar raktres mont war-zu diorren implij ar brezhoneg,
- Bez e rank ar raktres implijout ar brezhoneg evel yezh kentañ ar c'hehenterezh, ha n'eo ket e-giz un arouez sevenadurel nemetken,
- Bez e rank ar raktres reiñ lañs d'un obererezh kreñv pe war dachenn diorren implij ar brezhoneg, pe war dachenn skignañ ar yezh (magourioù, raktresoù dudi gant ar vugale h.a...).

An dougerien-raktres-mañ a rank talvoudekaat ha skoazellañ « **Ar Redadeg a di da di** », bez e rankont ivez reiñ an dorn d'ar c'helaouiñ ha d'an titouriñ a-benn dec'hervel ar Vretoned endro d'an darvoud-mañ, al ledanañ ar gwellañ.

4 • Mont en dro galv ar raktresoù

a • Piv a c'hell respont d'ar galv ?

Bez e c'hell ne vern peseurt aozadur kinnig ur raktres, nemet e ranker gouzout e vo roet muioc'h a bouez d'ar c'hevredigezhioù.

b • Palioù ar galv. War-c'hed a betra emaomp ?

- mont war-zu engouestl diorreerien implij ar yezh
- mont war zu sevel mennozhioù ha kinnigoù nevez o startijennaat implij ar brezhoneg,
- skoazellañ an doareoù intrudu a zegas ar brezhonegañ etre ar berzhidi.
- sikour da gas war-raok media nevez evit embann hag implijout ar yezh.



C • Kadarnaat ar galv :

Kuzul-merañ ar gevredigezh « Ar Redadeg a di da di » zo ar gwir gantañ da briziañ perzh mat ha talvoudegezh pep raktres. Bez e c'hello nac'hañ degemer ur c'hinnig ma kred dezhañ ne glot ket gant diazezoù ha temz-spered ar galv.

Kaset e vo goude ar raktresoù dalc'het d'ur « c'huzul ar re fur » a brizio pep raktres hag a skrivo kinnigoù evit arc'hantañ anezho. Lakaet e vo ar c'hinnigoù-se da votiñ gant ar vodadeg-veur.

Bodadeg-veur « ar Redadeg a di da di » a gadarna da ziwezhañ ar c'hinnigoù hag an dibaboù graet gant « kuzul ar re fur ».

d • Arc'hantañ ar raktresoù :

Ar sammad hollek lakaet gant ar gevredigezh evit harpañ ar raktresoù a vo hervez ar gounidoù dastumet e-pad Redadeg 2012 gant gwerzh ar c'hilometradoù hag ar produadoù stag. Lakaat a reer evel diazez e vo sikouret pep raktres hervez ur sammad a 5 000 euro d'an nebeutañ.

• Dibab ar raktresoù :

« Kuzul ar re fur » a raio e soñj hervez ar c'hrafoù priziañ-mañ :

- kloterezh gant palioù ha temz-spered ar galv,
- implij ar brezhoneg evit sevel ar raktres,
- doare liammañ an obererien war an dachenn dibabet ganto,
- live perzh an dud e-barzh framm ar raktres hag efedusted an abadennoù,
- perzh-mat ha liesseurted ar skorioù treuzkas implijet er raktres,
- pegeit e pado ar raktres ha pegen gouest e vo da badout a-hed ar bloavezhioù da heul.

f • Deiziataer galv ar raktresoù :

Kas ar c'hinnigoù : **a-raok ar 15 a viz Mae 2011**

Kadarnaat ar raktresoù : **bodad e penn-kentañ miz Even 2011.**

Adlañset eo ar Redadeg evit an trede gwech !

Bec'h d'ar raktresoù nevez ha kalon vat d'ar berzhidi !

